


Brezelourezed viking : kavadenn henoniel e Sveden



Pep gwir miret strizh.

Ar bez BJ 581 e Birka, Sveden.

E-touez arbennigourien ar Vikinged e oa un dodenn hag a rae sevel tabut abaoe bloavezhioù : daoust ha merc'hed a vrezel o doa stourmet e-kichen ar baotred ? Daoust ma oa menegoù hag a lakae da soñjal an dra-se e sagaoù pe e rentaoù-kont istorel, ne oa ket bet kadarnaet gant prouennoù diarvarus... Betek miz Gwengolo tremen.

a-raok sellet dre ar munud ouzh ar gavadenn-se e vefe mat degas soñj eus pelec'h e teu an istorioù brezelourezed e-touesk ar Vikinged.

ORIN AN ISTOR

Ar merc'hed-se a veze anvet "Skjaldmö" e norseg (*Sköldmö* e svedeg), "skoed-maouez", da lâret eo ur vaouez a vrezel ur skoed ganti.

Ar vammenn istorel gentañ zo deuet gant an istorour bizant Jean Skylitzes a skrive o doa stourmet merc'hed e strolladoù Sviatoslav I^{er} da vare tro-vrezel Bulgaria e 971. Souezhet e oa bet ar vrezelourien vizantat, e-kreiz emgann Dorystolon, o welet war an dachenn-emgann korfoù niverus merc'hed armet.

Ouzhpenn ar vammenn-se e kaver danevelloù enno menegoù eus ar Skjaldmöed e meur a saga :

- Brunehilde e *Volsunga Saga*.
- Hervor e *Saga Hervor hag ar Roue Heidrekr*.
- Priñsez Brynhild (pe Brunehilde) e *Saga Bósi hag Herraud*.
- Ar briñsez svedat Thornbjörg e *Hrólfs Saga Gautrekssonar*.
- Veborg e *Gesta Danorum*.
- Freydis Eiriksdottir (merc'h Erik ar Ruz) e *Saga Groenlandinga*.

Er memes mod, hervez *Saxo Grammaticus*² o doa 300 skjaldmö brezelet e tu an Daned en emgann Brávellir e 750. Meneget eo Lagertha peurgetket hag a stourme e tu Ragnar Lodbrok.

A-benn ar fin, sachet e oa bet adarre evezh an dud nevez zo gant ar skjaldmöed dre berzh ar stirad skinwel Vikings, Lagertha o vezañ e-touez an tudennoù pennañ.

SOÑJOÙ AN ARBENNIGOURIEN A-RAOK AR GAVADENN

Daoust hag-eñ e oa eus ar skjaldmöed un degouezh istorel gwirion pe ur vojenn ? Ne oa ket se ur goulenn a lakae an holl arbennigourien a-unan, ha tabut a oa savet etrezo.

Lod zo, evel Lars Magnar Enoksen, Neil Price pe Britt-Mari Näström a gave dezho e oa bet eus ar skjaldmöed hep mar ebet ; tud all evel Judith Jesch a save a-enep.

Evit ar re-se ne oa ket prouennoù a-walc'h hag hervezo, an danevelloù a venege ar skjaldmöed a oa kentoc'h skeuden-nadurioù da eñvoriñ ar Walkiried brudet.

Evel-just, n'eus den ebet a lak en arvar ar mennozh e oa hetusoc'h statud ar merc'hed er sevenadur viking eget hini o c'hempredadezed e Su Europa. Er memes mod e oa bet degemeret gant an arbennigourien, peurliesañ, e c'halle ar mer-

c'hed implijout armoù evit difenn o domani mar c'hoarveze un argad e-keit ma oa aet kuit ar baotred da gas ergerzhadegoù.

Hogen, gouzout da vat hag-eñ e oa evit gwir eus bagadoù brezelourezed hag a gemere perzh en ergerzhadegoù e-kichen ar baotred, ne oa ket an hevelep abaden... Betek ar gavadenn nevesañ neuze.

AR GAVADENN

Ar studiaden TDN³ bet kaset gant klaserien skolioù-meur Uppsala ha Stockholm eo an hini gentañ a ginnig ur brouenn skiantel e oa an dere a vrezelour digor d'ar merc'hed ivez da vare ar Vikinged.

"Meneget e vez, a-wechoù, merc'hed a vrezel e mammennoù skrivet, met ar wech kentañ eo dimp kavout ur brouenn henoniel kendrec'hus e oa bet anezho" a zispleg Neil Price, kelenner e Rann Henoniezh hag Istor an Henamzer e skol-veur Uppsala.

DIELFENNADUR GENETEK

Ar bez BJ 581, e kêr viking Birka e Sveden, a oa bet deskrivet da gentañ-holl gant Hjalmar Stolpe e 1889. Abaoe e oa sellet hennezh evel patrom ar bezioù brezelourien viking.

"Raklakaet e oa bet hed-ha-hed ar bloavezhioù-se, evel dre ziouer, e oa ur paotr ar brezelour" eme Jan Storå, kelenner e Rann



Lagertha, treset e 1913 gant Morris Meredith Williams (1881-1973).

Henoniezh ha Sevenadur an Henamzer e skol-veur Stockholm.

Er bez e oa kement artefakt a c'hortozer kavout e bez ur brezelour a renk-uhel, hini un ofiser marteze zoken : armoù niverus, ur c'hleze en o zouesk ; biroù studiet a-fetepañs evit sankañ en harnezioù ; ha daou jav. Ennañ e oa ivez ur c'hoari klok *Hnefatafl* (ur c'hoari tablez implijet evit gwellaat ar strategiezh brezel).

"Framm lodennoù ar skeledenn a roe da soñjal kreñv e oa ur vaouez, met o vezañ ma oa ar bez gwelet evel hini ur paotr abaoe ouzhpenn ur c'hantved, ezhomm hor boa da gavout peadra sur ha divarteze da dermenañ ar reizh" eme Anna Kjellström, klaskerez e Rann Henoniezh ha Sevenadur an Henamzer e skol-veur Stockholm.

Troet eo an henoniourien davet ar genetikourien evit kadarnaat reizh ar brezelour. TDN ar skeledenn zo bet dielfennet ha splann eo an disoc'h : ur vaouez e oa, da vat ! "Evit ar wech kentañ e c'haller kadarnaat asur ha genetek ez eo ur vaouez a vrezel viking" eme v-Mattias Jakobsson, kelenner e Rann ar Bevoniezh Organek e skol-veur Uppsala.

Interet eo bet ar skjaldmö e Birka, e-kreiz ar bloavezhioù 900. Kadarnaet eo dre zielfennadur izotop an eskern he doa kaset ar vaouez ur vuhez beajoù, ar pezh a glot peurvat gant sevenadur brezeliñ Vikinged ar mare-hont.



© History

Lagertha (Katheryn Winnick), er stirad skinwel Vikings, lañset e 2013 hag en e bempvet koulzad bremañ.

N'EO KET UR VOJENN KEN

"N'eo ket ur skeudenn faltaziet dre ar sagaoù. Ar pezh hon eus aze eo korf un den hag en doa an dere a vrezelour, a benn-brezel marteze zoken, hag ur vaouez e oa" eme Charlotte Hedenstierna-Jonson, henoniourez ha klaskerez e Rann Henoniezh hag Henistor e skol-veur Uppsala.

Ar studiaden-se zo ul lodenn eus ar raktres *Atlas*, ur programm enklask war istor genetek Skandinavia, kenrenet gant skolioù-meur Stockholm hag Uppsala. Embannet eo bet an danevell ofisiel en *American Journal of Physical Anthropology*, dindan an titl *A female Viking warrior confirmed by genomics*.⁴

Fulup Morcrette

1. Dug-Meur ar Vareged, da lâret eo ar Vikinged a zeue eus Sveden hag a oa aet kentoc'h war-zu ar reter, betek Konstantinopolis.
2. Manac'h hag istorour krenamzerel danat.
3. Trenkenn dezoksiribonukleek (TDN) : *acide désoxyribonucléique* (ADN) e galleg.
4. Evit lenn ar pennad : <http://onlinelibrary.wiley.com/doi/10.1002/ajpa.23308/full>